

**Debonjour dec'h va douç Janet
An daelou en ho taoulagat**

**Deud on eur voech c'hoas d'ho koëlet
Kent evid dont d'ho kuitat.**

**Kent kuitat an eb a garan
evid kement so er bed.**

**Pebeus kalonad eo dime
Goude beza re garet.**

**O santimant va mestres
meurbet a zo treïtour**

**evel ar grouanigou
a ia da fons an dour.**

**eur santimant goloët
kement-se a plich din**

**Dan hini voar ar fesson
Da zond d'he c'hondui.**

**— O prepochou den iaouank
a zo evel ar pel**

**Pa eustum neubeuta
A nich gant an avel.**

**O prepochou den iaouank
Zo evel pluñ var an dour**

**O komzou a dra certen
Meurbet a zo treïtour.**

**La fin manque. dem : a Jeanne
emeillet.**

Jannton Puil, 9 juin 1851.

Il n'y a pas de titre.